

## X

E Rumengol ar perhirin  
 A bedo stard war e zaoulin,  
 A welo a-dreuz e zaelou  
 Evel digor lez an Neñvou.

## XI

Ma ' salud teir gwech an aoter  
 En eur adori or Zalver,  
 Teir gwech e vezo benniget  
 Gand tri ferson sakr an Dreinded

## XII


Ma ' ra seiz gwech tro ar chapel  
 Gand Ave an êl Gabriel,  
 Mari hen diwallo bepred  
 Diouz Satan hag ar seiz pehed.

## XIII

Ha ma tigemer an osti,  
 E galon ennañ o virvi,  
 Ouz Jezuz e chomo stag mad:  
 Etrezo birviken kimiad.

## XIV

Perhirined, grit evelse,  
 Kaoud a refot grasou Doue  
 Hag e veh deuet en eur leñva,  
 C'hwi ' yelo kuit en eur gana.



**KANTIK**

**ITRON VARIA RUMENGOL**

## I

Lili arhantet o deliou  
 War ribl an dour 'zo er prajou ;  
 Doue dezo ro-as dillad  
 A skuill er mêziou peb c'hwez vad.

## DISKAN

Itron Varia Rumengol,  
 Gwerhez gallouduz, remed-oll,  
 Roit deom hirio, en an' Doue  
 Yehed ar horv hag an ene.

## II

O Ruméngol, pell amzer ' zo,  
 C'hwi eo boked kaerra or bro ;  
 Peb rozenn goant, peb lilienn  
 A zo disliv en ho kichenn.

## III

N'eus elestrenn ebéd er prad  
 A daolfe kement a c'hwez vad ;  
 E Leon, Treger ha Kerné,  
 Ganeoh e klever c'hwez an neñv.

## IV

Bleunia ' rit c'hoaz en ho kozni  
 E liorzig goudor Mari ;  
 Rag or mamm dous n'eo ket hedro  
 Pa gar eur wech eo 'vid atao.

## V

War an Arvor, gand ar werhez,  
 Oh bet laket da rouanez ;  
 Rumengol eo he merh hena  
 Ganti eo karet ar muia !

## VI

On tadou koz a oa kousket  
 E teñvalijenn ar pehed :  
 Maro, war roudou peb hini...  
 Ivern euzuz o tigeri...

## VII

War ar mên ruz e skuilled gwad,  
 Hag er Hrannou, e-kreiz ar hoad,  
 A zindañ dervenn Teutates,  
 Tud ' veze lazet heb truez.

## VIII

Tehit doueou digalon,  
 Setu Gwenole ha Grallon,  
 Tehit, tehit... War ar mên ruz  
 Eo savet chapel mamm Jezuz.

## IX

E-leh ar gwad, dour a vuez  
 A red en iliz ar werhez ;  
 He halon eo an eienenn  
 Ne vezo dizehet biken.